

K A I E R O U

.....

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G

.....

ESKOPTI KEMPER HA LEON

.....

XXXXXXXXXXXXXXXXXX

KAIER N° XIII

C'hwevrer ha Meurz 1971

.....

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages: 12 F.

C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec, (Ker-Anna, 29 S Quimper).

La 2ème série a commencé avec le n° XI - Avent 1970 - On peut encore se procurer la 1ère série, même prix et même adresse.

SKRITUR ZAKR EN OVERENN hag OREZONOU

C'hwehved Sul ordinal	75-78
Seizved Sul an amzer ordinal	79-83
Merher al Ludu	84-90
Sulvez kenta ar Horaiz (e 1971, 28 a viz C'hwevrer)	91-95
Eil Sul ar Horaiz	96-100
Trede Sul ar Horaiz	101-106
Pevare Sul d° 107-111. Pemped Sul ar Horaiz	112-116
Gouel Sant Jozef (19 a viz Meurz)	117-121
Gouel Maria Veurz (25 a viz Meurz)	122-126

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'ar 5 a viz c'hwevrer 1971.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

6 ved SUL ORDINAL

Bloavez C (14 C'hwevrer 1971)

Lennadenn Ia.- "Daou hent a zo, daou hent hebken;
Emaint digor dirag peb dén..."

Evelse e lavar kantik an Taolennou, war-lerh ar profed,
ar salm hag an Aviel a glevom hirio. Peb dén a rank ober
e zibab, penn da benn e vuez, etre an daou hent-se.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ (17/5-8)

5. Evelhénn e komz an Aotrou Doue:
Malloz d'an dén a lak e fizians e mab-dén,
a harp e vreh war an traou krouet,
hag a bella e galon diouz Doue.
6. Heñvel e vo ouz eur bod banal (pe: balan), e-unan el lanneg,
ha ne welo ket an evurusted o tond;
beva 'ray en douarou skarnilet,
douarou debret gand an hollen ha didud.
7. Bennoz, er hontrol, war an dén a lak e fizians en Aotrou Doue,
a zo an Aotrou e esperans.
8. Heñvel e vo ouz eur wezenn plantet war ribl an dour:
astennet he gwriziou beteg an dour-réd,
ne ra van ebed ma teu gwréz (pe: tommder), glas he deliou bepred;
ha pa vefe eur bloavez sehor, n'he deus ket aon da gaoud,
ha n'ehan ket da zougen frouez.

SALM 1 / 1-2, 3, 4 & 6 - Diskan: Eüruz an hini a garo Doue,
..... Euz e oll galon hag e oll ene.

1. Evuruz an dén ne fell ket dezañ heulia kenteliou an dud difeiz,
na mond war roudou ar beherien, nag azeza e-touez ar hoaperien,
2. an hini a vour (pe: a zo joa e galon) gand lezenn an Aotrou Doue,
hag a vez o vousekana e lezenn en deiz hag en noz.
3. Heñvel eo ouz ar wezenn plantet war ribl an dour,
a daol he frouez beb bloaz d'ar mare
ha ne vez morse gweñvet he deliou;
ha kement a ra a zeu gantañ da vad.
4. Pegen disheñvel eo planedenn an dud difeiz,
a zo evel ar pell, skubet gand an avel diwar al leur.
6. An Aotrou Doue a zell gand plijadur ouz an hent a ra an dud just,
e leh hini an dud difeiz a gas anezo da goll.

Eil Lennadenn.- Poueza 'ra sant Paol amañ war al liamm a zo
etre adsao da veo Or Zalver, a zo c'hoarvezet dija, hag adsao
an oll dud varo, a zo c'hoaz gortozet hag esperet.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT.
(15/12, 16-20)

12. Va breudeur, ma prezeger eo adsavet an Aotrou Krist a-douez ar re varo,
penaoz e hell lod ahanoh lavared n'eus ket a adsao ar re varo?
16. Ma ne zav ket ar re varo da veo,
neuze an Aotrou Krist, kennebeud, n'eo ket savet da veo;
17. ha ma n'eo ket savet an Aotrou Krist da veo,
n'eo diazezet ho feiz war netra, hag emaoch c'hoaz en ho pehejou.

18. Neuze ive, ar re a zo maro en Aotrou Krist a zo kollet evid mad.
19. Ha ni, ma 'z eo er vuez-mañ nemedkén on eus esperans en Aotrou Krist
ez eo or stad ar reuzeudika a hell beza.
20. Med bremañ, setu ar wirionez: an Aotrou Krist a zo savet
a-douez ar re varo,

ar henta euz an dud tremenet,
evel an dornad greun kenta euz an eostad.

ALLELUIA - (gand unan euz ar gwerzadou boaz)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (6/17, 20-26)

- En amzer-se, goude beza galvet daouzeg euz e ziskibien da veza ebestel,
17. Jezuz a oa diskennet ganto diwar ar menez
ha chomet a-zav war eur gompezenn,
e-leh ma oa eun niver braz a ziskibien dezañ
hag e-leiz a dud euz Bro Judea a-bez, euz kêr Jeruzalem,
hag euz an arvor (pe: ar riblou-mor) tro-dro da gêriou Tir ha Sidon.
 20. O veza savet e zaoulagad warzu o ziskibien, e lavare:
"Evuruz oh, c'hwi ar re baour,
rag deoh eo rouantelez Doue.
 21. Evuruz oh, c'hwi hag ho peus naon bremañ: ho kwalh a vo roet deoh.
Evuruz oh, c'hwi hag a ouel bremañ: c'hoarzin a reot.
 22. Evuruz e viot p'o devo an dud kaz ouzoh, pa daolint ahanoh er-mêz,
pa vo hoh ano dismeganset hag argaset ganto evel un dra fall
ablamour da Vab an dén.
 23. Bezit laouen en deiz-se, ha lammit gand ar joa,
rag ho tigoll a vo kaer en neñv.
Evelse ivez e ree o zadou d'ar brofeted.

24. Med siouaz deoh (pe: gwaz a-ze deoh), ar re binvidig,
o veza m'ho peus dija ho frealzidigez.
25. Siouaz deoh, c'hwi hag ho peus ho kwalh bremañ: bez' no po naon.
Siouaz deoh, bremañ o hoarzin: doan ha daelou a vo ho lod.
26. Siouaz deoh pa gomzo brao an oll dud diwar ho penn,
rag evelse e ree o zadou d'ar falz-profeted.

***** OREZONOU AR 6-ved SUL *****

PEDENN AN DIGOR.-- Aotrou Doue, c'hwi hag a lavar e plij deoh
ober ho chomaj er halonou eeun ha glan,
roit deom sikour ho kras, ma hellim beza
euz ar seurd tud fidel a deurvezit beva enno.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue...

WAR AR PROVOU.-- Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
ma talvezo ar brovadenn-mañ (pe: ar zakrifis-mañ)
da beurwalhi on eno ha da rei deom buez nevez;
deom-ni hag a glask heulia ho polentez, ra vo ive
eur vammenn a veritou evid ar ...
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

GOUDE KOMUNIA.-- Maget gand ar bevans dudiu deot euz an neñv,
ni ho ped, Aotrou Doue, da zerhel ennom bepred
ar hoant d'ar bevans-se, a ro deom ar vuez gwirion.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

*** Nota.-- Diwar ar "Missale Romanum"(1970) eo troet an orezonou ganeom;
an hini genta ne denn tamm ebed d'ar galleg; an hini ziweza
a zo heñvel, med e galleg ez eus eur mell "contre-sens".

SEIZVED SUL ORDINAL

Bloavez C (21 a viz c'hwevrer 1971)

Lennadenn Ia.-- Techet e vezom da rei taol evid taol, droug evid
droug. Amañ e welom David, gwallgaset gand ar roue
Saül, o pardoni dezañ dre zoujans evid Doue.

PENNAD EUZ LEVR KENTA SAMUEL (26/2, 7-9, 12-13, 22-23)

2. Ar roue Saül a oa eet en hent gand tri mil gwaz, ar re wella euz pobl Israel
da glask tapoud (pe: paka) David e goueleh Zif.
7. Epad an noz, David hag Abisaï a gav an tu da vond e-touez ar zoudarded;
kavoud a reont Saül gourvezet ha kousket e kreiz ar hamp,
e hoaf (pe: lañs) sanket en douar e-kichen e benn,
hag Abner, gand an dud a oa dindannañ, kousket en-dro dezañ.
8. Abisaï a lavar da Zavid:
"Doue e-neus laket hirio da enebour etre da zaouarn;
bremañ 'ta, lez ahanon da dreuzi e gorr beteg an douar
gand eun taol euz e hoaf e-unan, ha ne vo ket dao skei diou wech."
9. Ha David a respont d'Abisaï: "Diwall d'e laza!
Rag piou 'hellfe astenn e zorn da skei gand ar roue,
sakret a-berz an Aotrou Doue, ha chom digastiz?"
12. David, neuze, a gas gantañ ar goaf hag ar pod-dour,
a oa e kichen penn Saül, hag ez eont kuit,
heb da zén na gweled, na gouzoud tra, na dihuni: an oll a oa kousket,
rag kousk pounner e-noa taolet an Aotrou warno.
13. David, o veza tremenet war an tu all,
a zo chomet a-zav war gern ar menez, pellig mad ahano.
22. Gervel a ra Saül en eur hopal dezañ: "Aotrou Roue, setu da hoaf!
Da unan euz paotred ar roue treuzi beteg amañ d'e gerhad!

23. An Aotrou Doue a roio da bep hini e begement
hervez ma vo bet just ha feal.
Hirio e-noa an Aotrou laket ahanoh etre va daouarn,
ha me n'eo ket fellet din astenn va dorn
da skei gand ar roue, den sakret a-berz an Aotrou."

SALM 102 / 1-2, 3-4, 8 & 10, 12-13. (Doue trugarezuz, mestr da bardoni)

Diskan: Kanom bennoz da Zoue, va ene! Kanom bennoz da Zoue!
.....
(Ton el levr Kantikou n° 10)

1. Lavar bennoz da Zoue, va ene,
kement a zo em hreiz, bennoz d'e ano santel!
2. Ya, va ene, lavar bennoz d'an Aotrou,
na zizonj morse e oll vadoberou.
3. Eñ an hini a bardon dit da oll behejou,
a bare ahanout euz peb kleñved;
4. Eñ an hini a ziwall da vuez diouz ar maro,
a ra dit eur gurunenn gand e vadelez hag e drugarez.
8. Madelez ha trugarez eo an Aotrou Doue,
diwevad da dêri ha madelezuz kenañ.
10. N'eo ket hervez or pehejou e ra en or heñver,
n'eo ket diouz an droug a reom e kastiz ahanom.
12. Keit ha m'emañ ar zav-heol euz ar huz-heol,
e kas pell diouzom or pehejou.
13. Evel m'e-neus eun tad kalon dener ouz e vab,
evelse an Aotrou Doue evid an dud a zouj anezañ.

Eil Lennadenn. - Jezuz Krist a zo evid an oll dud eun eil Adam;
drezañ ez om eur ouenn-dud nevez grêt evid an neñv.

PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (15/45-49)

45. Va breudeur, an dén kenta, Adam, evel ma lavar ar Skritur,
a zo bet eur horv roet buez dezañ;
an eil Adam, Jezuz Krist, a zo eur spered hag a ro buez.
46. Ar' pezh a zeu da genta, n'eo ket buez ar spered, med buez naturel an den,
ha goude e teu hini ar spered.
47. An Adam kenta, tennet euz an douar, a zo grêt gand pri,
e leh an eil a zeu euz an neñv.
48. Par d'an hini grêt gand pri, an oll dud ive a zo grêt gand pri an douar;
ha par d'an hini deut euz an neñv,
an oll dud ive a zo an neñv o bro.
49. Setu perag, evel m'on eus douget ennom poltred an hini grêt gand pri,
e tleom dond da denna ive d'an hini euz an neñv.

ALLELUIA - (unan euz ar gwerzadou boaz)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (6/27-38)

- En amzer-se, Jezuz a brezege evelhénn d'an dud:
27. "Deoh-c'hwi ouz va zelaou e lavaran: Karit hoh enebourien,
grit vad d'ar re o deus kasoni ouzoh.
 28. Goulennit bennoz Doue war re a houlenn malloz warnoh,
pedit evid ar re ho tamall e gaou.
 29. D'an hini a sko ganez war eur jod, astenn ebén;
hag an hini a lamm diganez da vantell, lez anezañ
da gemer ivez da roched (pe: da zae).

30. Ro d'an neb a houlenn diganez,
 ha d'an neb a gemer da draou n'a ket da houlenn restaol.
31. Evel m'ho peus c'hoant e rafe deoh an dud, grit dezo ive.
32. Ma karit ar re ho kar, peseurd grad 'zo dleet deoh?
 Ar beherien o-unan a gar an neb o har.
33. Ma rit vad d'ar re a ra vad deoh, peseurd grad 'zo dleet deoh?
 Ar beherien o-unan a ra kement-se.
34. Ma prestit arhant d'ar re a esperit reseo diganto en-dro,
 peseurd grad 'zo dleet deoh? Ar beherien o-unan a brest d'ar
 beherien evid ma vo restaolet kemend all dezo.
35. Er hontrol, karit hoh enebourien,
 grit vad ha prestit heb gortoz netra en-dro.
 Neuze 'vo braz ho tigoll,
 hag e vezoh bugale da Zoue, mestr an neñv,
 rag mad eo eñ evid ar re zianaoudeg ha fallagr.
36. Bezit trugarezuz, evel m'eo trugarezuz ho Tad.
37. Na varnit ket, ha ne vezoh ket barnet;
 na gondaonit ket, ha ne vezoh ket kondaonet;
 pardonit, hag e vo pardonet deoh.
38. Roït, hag e vo roet deoh: eur muzuliad réz ar bord, stardet,
 hejet, leun-barr, a vo skuillet deoh en ho parlenn.
Rag diouz ar muzul a reot gantañ evid ar re all,
 e vo muzuliet deoh d'ho tro."

***** OREZONOU AR 7-ved SUL *****

PEDENN AN DIGOR - Grit, ni ho ped, Aotrou Doue,
 ma vo or zonzj bepred gand madou an ene,
 ha ma ne raim morse nemed ar pezh a blij deoh,
 dre gomz koulz ha dre ober.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo...

WAR AR PROVOU -
 Ho pedi a reom a greiz or halon, Aotrou Doue,
 en eur lida an overenn zantel gand an aked a dleom:
ar zakrifis a ginnigom en enor d'ho kloar,
 grit ma vo talvouduz ive d'or zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Grit, ni ho ped, Doue oll-halloudeg,
 ma hellim reseo en he féz ar zilvidigez evuruz
on eus bet an arrez (pe: an tañva) anezi dre an overenn-mañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

*** Testenn latin:

- 1) Praesta, quaesumus, omnipotens Deus, ut, semper rationabilia meditantes,
 quae tibi sunt placita et dictis exsequamur et factis.
- 2) Mystèria tua, Domine, debitis servitiis exsequentes, supplices te rogamus
 ut quod ad honorem tuae majestatis offerimus, nobis proficiat ad salutem.
- 3) Praesta, quaesumus, omnipotens Deus, ut illius salutis capiamus effectum,
 cujus per haec mysteria pignus accepimus.

=====

MERHER AL LUDU

(Peb tra a lakom hervez ar "Missale Romanum" 1970.)

KAN AN DIGOR - (diwar Levr ar Furnez, 11/24-27)

Truez a gemerit ouz an oll dud, Aotrou Doue,
ha n'ho peus kasoni ouz nikun euz ho krouadurien;
ne 'fell ket deoh sellad ouz pehejou an dud,
evid rei dezo amzer d'ober pinijenn,
ha pardoni 'rit dezo, rag c'hwi eo or Mestr, on Doue.

*** An heveleb testenn war gan (ton n° 21 "Eun Doue a zeu");
*** an 3e poz a zo er Skritur, med n'emañ ket el Levr-Overenn.

- | | |
|--|--|
| 1. C'hwi 'peus truez ouz an oll dud,
Doue, Tad oll-halloudeg;
Re vad oh 'vid kaoud kasoni
Ouz an dud krouet ganeoh. | 3. Penaoz 'hellfe nikun beva
Ma ne 'fell deoh e groui?
Penaoz 'hellfe chom e buez,
Ma n'eo ket dalhet ganeoh? |
| 2. Daoust pegen braz ar pehejou,
Ne 'fell ket deoh o gweled;
Gwelloc'h 'kavit rei d'ar peher
Amzer d'ober pinijenn. | 4. Pardoni 'rit d'ar beherien,
Doue, mignon d'ar re veo;
Enno e hwezit ho spered,
Hag e teuont beo en-dro. |

*** Al lid a binijenn a lezer a-gostez, pegwir e vo roet al ludu war-
lerh ar brezegenn. Rag-se, goude salud ar beleg ha Kyrie eleison,
e lavarer pedenn an digor, amañ war-lerh.

KEMPEDENN. - Roit deom ar hras, Aotrou Doue, da voulha, gand pinijennou
santel ar Horaiz, ar brezel on eus da rén er vuez kristen;*
evid stourm ouz an droug-sperejou, ra zeuio nerz deom
dre zioueri or boued hag on êzamanchoù.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo.....

LID AR GOMZ A-BERZ DOUE

Lennadenn Ia. - Dre vouez ar profed, om galvet da ober gwir
binijenn en eur zistrei daved Doue.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JOEL (2/12-18)

12. Setu petra 'lavar an Aotrou Doue: Distroit ouzin a greiz ho kalon,
grit yun, skuillit daelou, gand hirvoudou glaharuz.
13. Rogit ho kalonou, ha n'eo ket ho tillad,
ha distroit ouz an Aotrou, ho Toue,
rag leun eo a vadelez hag a drugarez,
hir amzer e hortoz araog skei, braz eo e garantez,
ha buan eo prest d'ankounahaad an droug.
14. Piou 'oar ha ne zistroio ket davedoh,
evid pardoni ha skuill warnoh e vennoziou,
hag ho pezo tu da ginnig sakrifisou ha provou?
15. Sonit an drompill (pe: ar horn-boud) e kêr Zion,
lakit yun santel evid an oll, embannit gouel braz,
dastumit ar bobl,
16. galvit an dud d'en em voda, galvit da zond ar re goz
hag ar vugaligou, ha pa vent c'hoaz o téna;
ra guitaio ar pried nevez e gambr, hag ar wreg nevez he gwele.
17. Etre an nor-dal hag an aoter ez aio ar veleien, servicherien an Aotrou,
hag a-dreuz o daelou e lavarint:
"Truez, Aotrou Doue, truez ouz ho pobl!
Na lezit ket ho pugale da veza dismeganset ha goapeet gand ar
bayaned. Mirit na hellfe ar poblou-se lavared:
E peleh 'ta emañ o Doue?
18. Hag an Aotrou Doue 'zo bet tenerreet e galon/e-keñver e vro,
truez e-neus bet ouz e bobl.

SALM 50 - "Miserere" (3-4, 5-6a, 12-13, 14 & 17)

Diskan: (Kantik n° 36) Pehet am eus, ha kalz pehet;
Truez ouzin, Salver karet! (2 w.)

3. Truez ouzin, va Doue, ablamour d'ho madelez;
en ho trugarez vraz, lamit va mañkou en ho keñver.

4. Va gwalhit penn-da-benn euz an droug am eus grêt;
goude va fehed, grit ahanon glan adarre.

5. Ya, añzav a ran oun bet mañket en ho keñver;
noz-deiz emañ va fehed dirazon.

6. Eneb deoh, ha deoh hebkén, am eus pehet,
ar pez a zo fall dirazoh am eus grêt.

12. Krouit ennon, va Doue, eur galon hlan,
lakit em hreiz eur volonteiz stard.

13. Mirit na dehfen mui pell diouzoh,
ha na dennit ket diganin ho spered a zantelez.

14. Rentit din ar joa da veza salvet ganeoh,
roit din kalon vad d'am harpa nerzuz.

17. Aotrou Doue, digorit din va muzellou,
ma savin va mouez evid ho meuli.

Eil Lennadenn. - Dre vouez an Aboqtol ivez e teu Doue d'or
gervel: greom or peoh gantañ, dré Or Zalver.

PENNAD EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (5/20 - 6/2)

5/20. Va breudeur, a-berz Or Zalver om bet karget da brezeg,
ha dre or mouez, Doue eo a zeu d'ho kervel;
hoh aspedi a reom a-berz Or Zalver: grit ho peoh gand Doue.

21. Eñ ha ne ouie ket petra eo pehi,
e-neus Doue grêt anezañ pehed ablamour deom,
evid ma teufem-ni da gaoud santelez Doue drezañ.

6/1. A-unan gantañ e labourom, pa ho pedom stard da ziwall
na jomfe difrouez ar hras ho peus bet digand Doue.

2. Rag lavared a ra er Skritur Zakr:
"Da vare an drugarez e selaouan ahanoh,
da zeiz ar zilvidigez e teuan d'ho sikour."
Setu bremañ mare an drugarez, va breudeur,
setu bremañ deiz ar zilvidigez.

SALUD D'AN AVIEL (1)

Diskan: Poent ez eo deoh, peher, distrei ouz ho Salver (bis)

- Kant. n° 23 -

V/ Ne houlennan ket maro ar peher, eme an Aotrou,
med e zistro davedon, evid ma vevo. (Ez. 33/11)

(1) Epad ar Horaiz, koulz da zul ha war ar pemdez, ne ganer ket an Alleluia.
Ar gwerzadou kinniget en "Ordo Lectionum" evid ar zalud d'an Aviel a
zispieg galvadenn Doue o lavared d'an dud chench buez, trei kein d'ar
pehed ha digeri o halon d'ar fizians ennañ ha d'ar garantez.

Pa vez tu d'ober ar zalud-se war gan, an êsa eo kemer eur poz
(unan a zo trawalh) euz "Kantikou ar mision" - azaleg an n° 21 e levr
Kantikou Kemper - rag leun eo ar hantikou-se euz bouedenn ar salmou, ar
brofetad hag an Aviel.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. (6/1-6, 16-18)

D'e ziskibien bodet en-dro dezañ war ar menez, Jezuz a lavare:

1. Diwallit da ober hoh oberou mad dirag an dud evid beza gwelet ganto, pe n'ho pezo digoll ebed digand ho Tad euz an neñv.
2. Neuze 'ta, pa rit aluzen, na zonit ket ar horn-boud dirazoh, evel ma ra ar re a vez er zinagogou ha war ar ruiou o klask sellou an dud, evid bāza meulet ganto.
E gwirionez, m'hen lavar deoh, bez' o deus dija o fae.
3. Med c'hwi, pa rit aluzen, ho torn kleiz n'e-neus ket da houzoud
4. petra ra ho torn deou, hag evelse e chomo kuzet hoh aluzen, hag ho Tad, a wel peb tra kuzet, hen talvezo deoh.
5. Pa vezit o pedi ivez, na rit ket evel ar re a glask sellou an dud, a gar ober o fedennou en o zav, er zinagogou hag e korn ar plasennou, evid beza gwelet gand an dud.
E gwirionez, m'hen lavar deoh, bez' o deus dija o fae.
6. C'hwi, pa bedit, it en ho kambr, serrit an nor warnoh, ha pedit ho Tad, a zo aze el leh kuz;
hag ho Tad, pa wel peb tra kuz, hen talvezo deoh.
16. Ha pa rit yun, na vezit ket evel ar re a glask sellou an dud, a ziskouez o fennou distruj
evid ma vo sklêr d'an dud e reont yun.
E gwirionez, m'hen lavar deoh, bez' o deus dija o fae.
17. C'hwi, pa rit yun, taolit louzou c'hwez-vad war ho penn ha gwalhit ho tremm (pe: ho pizaj);
18. evelse ne vo ket anavezet gand den emaoch o yun, nemed gand ho Tad, a zo e peb leh kuz;
hag ho Tad, pa wel peb tra kuz, hen talvezo deoh.

DA VENNIGA AL LUDU (goude ar brezegenn)

Ar beleg, en e zav, a lavar unan euz an diou bedenn amañ war-leñh, gand eur gérig araog, evelhenn pe en eun doare all:

Va breudeur kër, pedom a greiz kalon Doue, on Tad, ma plijo gantañ taoler e vennoz madelezuz war al ludu-mañ ha warnom-ni, a zo o vond da lakad ludu war or pennou dre binijenn (pe: evid merka or bolontez d'ober pinijenn).

Pedenn a / Aotrou Doue, c'hwi a vez tenerreet gand ar re 'n em lak izel ha ne jomit ket kounnaret ouz an dud a ra pinijenn; selaouit or pedennou en ho madelez, ha skuillit grasou ho pennoz war ho servicherien a zo o vond da reseo al ludu: grit ma lakint o foan, penn-da-benn ar Horaiz santel, da nêtaad o halonou, evid beza e stad da lida mister ar Pask, hini Or Zalver, ho Mab, maro hag savet da veo evid or zilvidigez. Drezañ, on Doue beo a oll viskoaz da virviken.- Amen.

Pedenn b / Aotrou Doue, n'eo ket maro ar beherien a glaskit, med o distro davedoh selaouit or pedennou gand madelez, ha plijet ganeoh + benniga al ludu-mañ, emaoch o vond da lakaad war or pennou; ni hag a anzav ez om grêt gand poultrenn an douar hag e tleom mond en-dro da boultrenn, grit deom heulia a-zevri ar Horaiz-mañ, evid reseo diganeoh ar pardon euz or pehejou hag ar hras da veva eur vuez nevez, diwar skouer ha patrom ho Mab savet a varo da veo. Drezañ, Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.
(Bez' e hell taoler dour benniget war al ludu, heb gér ebed.)

DA REI AL LUDU

Ar beleg a lak ludu d'an dud fidel war o fenn, pe war o zal,
en eur lavared da bep hini:

Grit pinijenn, ha kredit en Aviel.

pe: Sonjit ez oh ludu, hag ez eot en-dro da ludu.

Epad ar brosesion da reseo al ludu, e kaner eur hantik
a binijenn (el levr Kantikou, azaleg an n° 21).

*** War-lerh lid al Ludu, e reer ar Bedenn evid an Iliz hag ar bed,
ha da houde lid ar Zakramant.

PEDENN WAR AR PROVOU -

Ar zakrifis-mañ a ginnigom, Aotrou Doue,
da zigeri, evel beb bloaz, amzer zantel ar Horaiz,
o houlenn diganeoh nerz da boania gand an oberou a binijenn
hag a garantez, ha da gabestra or hoantou fall,
evid ma hellim, gwalhet euz or pehejou,
lida gand karantez Pasion ha maro ho Mab,
Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

Prefas ar Horaiz: ... Rag dre or pinijennou...

GOUDE KOMUNIA -

Ar gomunion on eus grêt, Aotrou Doue, ra zigaso sikour deom,
ovid ma hello on oberou a binijenn plijoud deoh ha talvoud d'or parea.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

SULVEZ KENTA AR HORAIZ

Bloavez C (28 a viz c'hwevrer 1971)

Lennadenn Ia.- Taolom evez ouz an daou boent-mañ: da genta, ar
hinnig da Zoue euz frouez kenta an eost, evid anzav ez eo eñ
an Aotrou, gwir berhenn d'an douar ha d'ar pez a zoug dre
labour mab-dén. D'an eil, ar zoñj miret gand bugale Israel
euz an oberou kaer grêt gand Doue d'o zavetei. Ha ni, kriste-
nien, on eus kaerroh c'hoaz gand ar zoñj euz kement a ra Doue
evidom dre Or Zalver.

PENNAD EUZ LEVR AN ADLEZENN (Deut. 26/4-10)

Moïzez a lavare da bobl Israel:

4. Pa zigasi ar frouez kenta euz da eost,
ar beleg a gemero ar banerad euz da zaouarn
evid he lakaad dirag aoter an Aotrou, da Zoue.
5. Te, neuze, a lavaro kement-mañ dirag an Aotrou, da Zoue:
"Va zad a oa eun Aramead heb annez (pe: reder-bro);
diskennet eo bet e Bro-Ejipt gand eun dornadig tud hebkén,
hag éno e-neus bevet evel estrañjour;
med deuet eo da veza eur boblad vraz, gallouduz ha niveruz kenañ.
6. Gand an Ejipsianed om bet gwallgaset ha gwasket,
taolet warnom yeo eur sklaverez pounner.
7. Savet on eus or mouez warzu an Aotrou, Doue on tadou;
or zelaouet e-neus, ha sellet pegen reuzeudig e oam,
pegen braz or poan hag on anken.
8. An Aotrou e-neus grêt tehoud diouz Bro-Ejipt
dre e zorn kreñv hag e vreh stegnet (pe: astennet),
e-kreiz oberou gouest da sponta, sinou ha burzudou.

9. Heñchet e-neus ahanom beteg amañ, ha roet deom ar vro-mañ,
eur vro a red enni al lêz hag ar mël.
10. Ha setu bremañ e teuan da zigas an dornadou kenta
euz frouez an douar ho peus roet din, Aotrou Doue."

SALM 90 / 1-2, 10-11, 12-13, 14-15

Diskan: C'hwi 'vo ganin en derveziou kaled, va Doue.

1. Skoachet dindan gwarez Mestr an neñvou,
lojet dindan skeud Doue oll-halloudeg,
2. Lavar d'an Aotrou: C'hwi va repu ha va hastell,
va Doue, emañ va fizians ennoh.
10. Droug ebed ne dizo ahanout, gwalenn ebed ne dostaio ouz da di;
11. Rag d'e êlez e-neus roet urz
da ziwall ahanout hed-a-hed da hent.
12. War o daouarn e vi douget ganto,
da vired na stokfe da droad ouz eur mên.
13. War an naer hag ar hrug e helli kerzed,
flastra 'ri dindannout al leon hag an aerouant.
14. Ablamour m'e-neus roet din e garantez, me e ziwallo;
e zivenn a rin, ablamour m'anavez va ano.
15. Sevel a ray e vouez d'am gervel, ha me 'zelaouo outañ;
gantañ e vin en derveziou kaled,
evid e zavetei ha rei enor dezañ.

Eil Lennadenn. - Talvoudegez ar feiz: kredi e Jezuz Krist a zo
red evid beza salvet.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN R6M. (10/8-13)

8. Va breudeur, petra 'lavar ar Skritur?
"Tost dit emañ komz Doue, war da vuzellou hag en da galon."
Ar gomz-se eo hini ar feiz a brezegom.
9. Setu eta, gand ma tisklerio da vuzellou eo Jezuz an Aotrou,
ha ma kredi en da galon e-neus Doue savet anezañ a-douez ar
e vezi salvet.
10. Rag dre gredi a wir galon e vezer lakeet e stad a hras,
ha dre ziskleria ar feiz a henou ez eer d'ar zilvidigez.
11. Daoust ha ne lavar ket ar Skritur:
Kement hini e-neus feiz ennañ n'e-no ket kerse.
12. N'eus eta kemm ebed etre ar Juzeo ha tud ar poblou all,
rag oll o deus an heveleb Aotrou,
brokuz e-keñver an oll dud en em erbed outañ;
13. Rag skrivet eo: Kement hini en em erbed ouz an Aotrou, a vo salvet.

SALUD D'AN AVIEL - V. N'eo ket diwar vara hebkén e vev mab-dén, eme Or Zalver,
med c'hoaz diwar gement komz lavaret gand Doue (Mt 4/4)
pe war gan (an ton a hell beza hini ar poziou euz "D'or mamm zantez
Anna", pe hini an n° 83 "O Mamm a garante")

N'eo ket bara hebkén
A vag buez mab-dén;
E vevañs eo ive
Peb komz digand Doue.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (4/1-13)

1. Jezuz, karget euz ar Spered Santel, a zo distroet diouz ar ster Jordan, ha bleniet e oa gand ar Spered er goueleh. (pe: en dezert)
2. Daou-ugent dervez eo bet eno, tentet gand an diaoul.
N'e-neus debret netra epad an deiziou-se,
ha pa 'z int bet echu, ez eus deut naon dezañ.
3. Neuze e teu an diaoul da lavared dezañ:
"Ma 'z out-te Mab da Zoue, lavar d'ar mein-mañ trei e bara."
4. Respont a ra Jezuz dezañ: "Skrivet eo:
N'eo ket diwar bara hebkén e vevo an dén."
5. O veza kaset anezañ uhelloc'h, an diaoul a ziskouez dezañ
oll rouanteleziou ar bed, amzer eun taol lagad,
6. hag a lavar dezañ: "Dit e roin ar vestroni war an oll vroioù-se
hag o gloar; rag etre va daouarn int bet laket,
ha d'an neb a 'fell din e roan anezo."
7. Te eta, n'az peus nemed stoui dirazon, e vezint oll dit."
8. Respont a ra Jezuz: "Skrivet eo:
An Aotrou, da Zoue, a stoui dirazañ, ha n'adori nemetañ."
9. An diaoul a gas c'hoaz Jezuz da Jeruzalem, hag a lak anezañ
war gern (pe: beg uhella) an Templ; neuze e lavar dezañ:
"Ma 'z out-te Mab da Zoue, en em daol ahann d'an traoñ."
10. Rag skrivet eo e-neus roet urz d'e êlez d'az tiwall,
11. ha c'hoaz: War o daouarn e tougint ahanout,
da vireñ na stokfe da droad ouz eur mên.
12. Respont a ra Jezuz dezañ: "Lavaret eo er Skritur:
Ne denti ket an Aotrou, da Zoue."
13. En taol-mañ, echu gantañ klask touella Jezuz e peb doare,
an diaoul a deh kuit dioutañ, da hortoz e vare.

OREZONOU ha PREFAS evid SUL KENTA AR HORAIZ

PEDENN AN DIGOR.-

Roit deom ar hras-mañ, Doue oll-halloudeg :
en eur heulia pedennou hag oberou santel ar Horaiz,
ra zeuim da gompren gwelloc'h mister braz
ar zilvidigez dre Jezuz Krist,
ha da labourad evid ar zilvidigez-se en eur veva direbech. Dre...

WAR AR PROVOU - Plijet ganeoh, Aotrou Doue, lakad ahanom e stad vad
evid kinnig ar zakrifis-mañ da zigeri amzer zantel ar Horaiz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PREFAS - dre Jezuz Krist, or Zalver.
Pa 'z eo chomet daou-ugent dervez heb debri,
e-neus-eñ roet ar skouer genta euz Koraiz ar gristenien;
hag, en eur ziarbenn ardou an droug-spered,
e-neus desket deom trehi war an techou fall,
evid ma hellim, o lida euz or gwella mister braz Pask Or Zalver,
beza prest da dreiza, da fin or buez,
beteg Pask peurbaduz ar baradoz.
Setu perag....

GOUDE KOMUNIA - Resevet ganeom ar bara euz an neñv,
a vez gantañ maget ar feiz, starteet an esperans
ha roet nerz d'ar garantez,
ni ho ped, Aotrou Doue: grit ma teskim
kaoud naon euz Or Zalver, ar bara beo ha gwirion,
hag en em vaga diwar gement komz lavaret deom ganeoh.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

Lennadenn Ia. - Abraham e-neus plijet da Zoue ablamour d'e feiz,
ha Doue e-neus e zibabet evid ober emgleo gantañ.

PENNAD EUZ LEVR PENN KENTA AR BED (15/5-12, 17-18)

Goude beza komzet ouz Abraham en eur weledigez,

5. an Aotrou Doue a gas anezañ er-mêz euz e deltenn, hag a lavar dezañ:

"Sell ouz an oabl, ha kont ar stered, mar gellez."

Lavared a ra ouspenn: "Evelse e vo lignez da vugale."

6. Abraham e-neus bet feiz en Aotrou Doue,
hag an Aotrou, ablamour da ze, e-neus laket anezañ e stad a justis.

7. Goudeze e lavar an Aotrou Doue:

"An Aotrou on, me am eus da dennet euz kêr Our, e Bro-Galde,
evid ober ahanout perhenn ar vro-mañ."

8. Abraham a respont: "Aotrou, va Doue,
diwar betra e hellan-me gouzoud e vin perhenn dezi?"

9. An Aotrou a lavar dezañ: "Kemer evidon eun ounner tri bloaz,
eur haor tri bloaz, eur maout tri bloaz,
eun durzunell hag eur goulmig."

10. O veza kemeret an oll loened-se, Abraham a rann pep hini e daou,
hag a lak peb hanterenn an eil dirag ebén;
al laboused, evelato, n'int ket bet hanteret.

11. Laboused-preiz a zo diskennet da zailla war ar horvou maro,
hag edo Abraham o tichoual anezo.

12. Da vare kuz-heol, ez eus deut kousk pounner da Abraham,
ha kouezet warnan anken ha teñvalijenn.

17. Eur wech eet an heol da guzad, ha deut teñvalijenn du,
ez eus bet gwelet eun tan braz leun a voged hag eun eteo tan
o tremen etre an hanterennou loened.
18. En deiz-se, e-neus an Aotrou Doue grêt emgleo gand Abraham,
dre ar homzou-mañ: "D'az lignez e roan ar vro-mañ."

SALM 26 / 1, 7-8a, 8bc & 9c, 13-14

Diskan: Sklerijenn ha silvidigez
..... eo an Aotrou Doue 'vidon.

1. Va sklerijenn ha va zilvidigez eo an Aotrou: rag piou am-mo aon?
Moger-divenn va buez eo an Aotrou: dirag piou e krenin?
7. Selaouit, Aotrou Doue: euz va oll mouez ho kalvan;
kemerit truez ouzin, ha respontit din.
- 8a. Ouzoh e komz va halon, c'hwi eo a glaskan.
- 8b. Gweled ho tremm a glaskan, Aotrou Doue, na guzit ket diouzin.
- 9c. Va zikour oh-c'hwi, n'am dilezit ket, na dehit ket diouzin, Doue,
va Zalver.
13. Sur on e welin madelez an Aotrou Doue, e bro ar re veo!
14. Gortoz an Aotrou gand fizians, bez dispont ha kaloneg,
gortoz an Aotrou Doue.

Eil Lennadenn. - Selaouom sant Paol o prezeg c'hoaz an esperans:
delher stard, fidel d'Or Zalver, evid beza,
korv hag all, karget a hloar gantañ.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (3/17 - 4/1)

17. Va breudeur, kemerit oll skouer diwarnon, ha sellit ervad
ouz ar re a vev hervez ar skouer a gavit ennom.
 18. Siouaz! meur a hini a zo, dre o buez, evel ma lavaren deoh aliez
- ha bremañ hen lavaran c'hoaz, an dour em daoulagad -
enebourien da groaz ar Zalver:
 19. d'en em goll ez eont, o hov eo o doue, o fouge a lakont en o méz,
ha ne brizont nemed traou an douar-mañ.
 20. Ni, avad, eo an neñv or gwir vro; ahano eo e hortozom da zond,
evel Salver, Jezuz Krist, on Aotrou.
 21. Eñ a jeñcho doare d'or horvou dister
hag o lako par d'e gorv glorïuz,
dre ar galloud e-neus da veza mestr war an oll draou.
- 4/1 Evelse 'ta, va breudeur kër, am eus mall da weled en-dro,
va levenez ha va hurunenn,
dalhit stard en Aotrou Krist, ya! va breudeur karet.

SALUD D'AN AVIEL.- X. Meuleudi deoh, Aotrou Krist, Mab karet an Doue beo!

A greiz ar goabrenn lugernuz, e teu eur vouez, an Tad o komz:
Setu va Mab muia-karet, selaouit outañ.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (9/28b-36)

28. En amzer-se, Jezuz a gemer gantañ Per, Jakez ha Yann,
hag a bign war ar menez da bedi.
29. Tra m'edo o pedi, eo deut e zremm da gaoud eun doare all,
hag e zillad da veza gwenn-kann ha lugernuz.
30. Ha setu daou zen o tivizoud gantañ: Moïze hag Eliaz e oant;

31. deut da bara er hloar, e komzent gantañ euz e gimiad
a oa vond da ober e Jeruzalem.
32. Per hag an daou all a oa maro gand ar hoant kousked;
chomet dihun koulskoude, o deus gwelet gloar Jezuz
hag ivez an daou zen en e gichen.
33. D'ar poent m'emañ o vond d'e guitaad, Per a lavar da Jezuz:
"Mestr, eun dra gaer eo e vijem amañ; savom teir deltenn,
unan evidoh, eun all evid Moizez, hag unan evid Eliaz."
Ne oar ket petra 'lavar.
34. Tra m'emañ o komz evelse, e teu eur goabrenn da leda he skeud warno,
hag e krog aon enno oh antreal er goabrenn.
35. Eur vouez a glever o tond euz ar goabrenn, o lavared:
"Setu va Mab muia karet, selaouit anezañ."
36. Epad ma komze ar vouez, ez eo Jezuz en em gavet e-unan penn.
An diskibien o deus grêt peoh, ha n'o deus, d'ar mare-se
lavaret grig da zen ebed euz ar pezh o doa gwelet.

OREZONOU ha PREFAS evid EIL SUL AR HORAIZ

PEDENN AN DIGOR.

Aotrou Doue, ho peus gourhemennet deom selaou ho Mab karet,
ho pet ar vadelez da vaga on eneou gand ho komz,
evid ma vo sklêrreet sellou or spered
ha ma hellim, e-kreiz al levenez, gweled splannder ho kloar.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo...

WAR AR PROVOU -

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma talvezo ar zakrifis-mañ
da walhi or pehejou ha da zantellaad korv hag ene ho tud fidel,
evid ma vint e stad vad da lida goueliou ar Pask.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PREFAS -

..... dre Jezuz Krist, or Zalver.
Goude beza, en araog, diskleriet doare e varo d'e ziskibien,
e-neus Jezuz, war ar menez santel,
diskouezet dezo splannder e hloar,
evid rei da intent, harpet war desteni Moizez hag ar brofeted,
ez eo dre boaniou ar Basion
e tleer mond da hloar an adsao da veo.
Setu perag....

GOUDE KOMUNIA.

Aotrou Doue, en eur reseo er zakramant
Or Zalver beo da viken en e hloar,
ez eus mall ganeom d'ho trugarekaad
evid ar vadelez ho peus, p'emaom c'hoaz er bed-mañ,
da rei deom perz e madou ar baradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

TREDE SUL AR HORAIZ

Bloavez C (14 a viz meurzh 1971)

Lennadenn Ia.- Gwelom penaoz en em ro Doue da anaoud da Voizez.
Ma chom kuzet ouz daoulagad mab-dén, Doue e-unan
a lavar piou eo hag ar zoursi e-neus euz e bobl.

PENNAD EUZ EIL LEVR MOIZEZ (Ex. 3/1-8a, 10, 13-15)

1. Moïzez a oa mesaer (pe: pastor) war-dro deñved Jezro,
e dad-kaer, beleg bro Madian.
Eun dervez m'e-noa kaset e loened en tu all d'ar goueleh (pe: dezert),
ez eo erru beteg menez Doue, ar Menez Horeb.
2. El an Aotrou Doue a bar dirazañ e-kreiz eun tan o tond euz eur bod-spern.
Selled a ree Moïzez: ar vodenn a oa an tan enni, ha ne ezve ket.
3. Neuze e-neus lavaret: "Mond a ran da dostaad,
evid gweled ar weledigez eston-se
ha gouzoud perag ne zev ket ar vodenn.
4. An Aotrou Doue, o veza gwelet anezañ o tostaad,
a halv Moizez euz a greiz ar vodenn: "Moizez! Moizez!"
Ha Moizez da respont: "Setu me."
5. Ha Doue da lavared: "Diwall da dostaad amañ, tenn da zandalennou,
rag al leh m'emaout a zo douar santel."
6. Ha goudeze e lavar: "Me 'zo Doue da dad, Doue Abraham, Izaag ha Jakob."
Moizez neuze a vouñch e benn,
kement a aon e-noa da bara e zaoulagad war Doue.
7. An Aotrou a lavar c'hoaz:
"Gwelet am eus stad reuzeudig va fobl e Bro-Ejipt,
ha klevet am eus anezo o krial dindan taoliou garo o mistri labour.
Ya. anaoud a ran o foaniou.

- Ha setu perag on diskennet
Evid tenna anezo a-dre daouarn Ejiptiz (pe: an Ejipsianed),
ha kas anezo ahann warzu eur vro leuar mad ha frank enni,
eur vro 'leh ma red al lêz hag ar mël, bro Ganaan.
10. Ha bremañ, en hent! Da gas a ran daved ar roue Faraon,
evid tenna bugale Israel, va fobl, er mêz euz Bro-Ejipt."
13. Respont a ra Moizez da Zoue:
"Emaon eta o vond da gaoud bugale Israel, da lavared dezo:
Doue ho tadou e-neus va digaset d'ho kaoud;
med, ma houlennont ouzin: Pe ano eo? petra 'lavarin dezo?"
14. Doue a lavar da Voizez: "Me 'zo an hini a zo. Hag evelhenn e responti
da vugale Israel: An hini a zo e-neus va digaset d'ho kaoud."
15. Hag eur wech c'hoaz e lavar Doue da Voizez:
"Evelhenn e komzi ouz bugale Israel: Yahwe, an Aotrou,
Doue ho tadou, Doue Abraham, Doue Izaag, Doue Jakob,
e-neus va digaset d'ho kaoud.
Va ano 'vo hennez da viken,
gand ar zonzj anezañ e reot medleudi din a rumm da rumm."

SALM 102 / 1-2, 3-4, 6-7, 8 & 11

Diskan: Kanom bennoz da Zoue, va ene; Kanom bennoz da Zoue.

.....

pe: Mad ha trugarezuz oh, va Doue; Mad ha trugarezuz oh.

....

(Ton: hini an diskan el levr Kantikou, n° 10)

1. Lavar bennoz da Zoue, va ene;
kement a zo em hreiz, bennoz d'e ano santel.
2. Ya, va ene, lavar bennoz d'an Aotrou,
na zizonj morse e oll vadoberou.

3. Eñ an hini a bardon dit da oll behejou,
a bare ahanout euz peb kleñved;
4. Eñ an hini a ziwall da vuez diouz ar maro,
a ra dit eur gurunenn gand e vadelez hag e drugarez.
6. An Aotrou a houarn ar bed hervez e justis,
hag a rent o gwir d'an oll dud gwasket.
7. Dizoloet e-neus e venoziou da Voizez,
e vurzudou kaer da vugale Israel.
8. Madelez ha trugarez eo an Aotrou Doue,
diwevad da dêri ha madelezuz kenañ.
11. Ken uhel ha ma'z eo an neñv 'uz d'an douar,
ken braz eo e vadelez evid ar re a zouj anezañ.

Eil Lennadenn.- Kenteliou a zo evidom er Skritur Zakr: ar
gwall-implij o deus grêt bugale Israel euz madoberou
Doue, d'ar gristenien eo diwall d'ober ken gwaz.

PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (10/1-6, 10-12)

1. Ne garfen ket, va breudeur, e vefeh heb gouzoud
penaoz eo bet on tadou gwechall, p'o deus kuiteet Bro-Ejipt:
oll int bet goloet gand ar goabrenn,
oll o deus treuzet ar Mor Ruz;
2. oll int bet, dre Voizez, badezet er goabrenn hag er mor;
3. oll o deus debret an heveleb boued, a oa hini ar spered;
4. oll o deus evet an heveleb evaj, a oa ivez euz ar spered,
rag eva a reent dour euz ar roh a gerze d'o heul,
hag ar Zalver e oa ar roh-se.

5. Ha koulskoude, ar peb brasa anezo o deus displeijet da Zoue,
kén ez int bet diskaret er goueleh.
6. Kement-se a zo digouezet ganto evid rei kentel deom
hag herzel ouzom da hoantaad an droug, evel m'o deus grêt ar re-ze.
10. Na hrozmolit ket a-eneb Doue, evel m'o doa grêt lod anezo,
hag a zo bet lazetañ gand an êl distrujer.
11. An oll draou c'hoarvezet ganto a oa kement a genteliou evidom,
ha laketañ int bet dre skrid evid or sklerijenna,
ni hag a zo en em gavet gand fin an amzeriou.
12. Rag-se 'ta, an hini a zont dezañ beza stard en e zav,
taoler evez da goueza.

SALUD D'AN AVIEL.- Poent ez eo deoh, peher, distrei ouz ho Salver. (bis)
(Levr Kantikou, n° 23)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (13/1-9)

1. En amzer-se, e oa deut tud da zigas kelou da Jezuz
diwarbenn ar Halileaned e-noa Pilat mesket o gwad
gand hini o zakrifisou.
2. Ha Jezuz a respont dezo: "Ha kavoud a ra deoh e oa ar Halileaned-se
gwasoh peherien eged an oll dud all a Vro-Halilê,
ablamour m'o deus gouzañvet kastiz (pe: poan) ken garo?"
3. Ne oant ket, m'hen lavar deoh; med, ma ne rit ket pinijenn,
c'hwi oll a yelo da goll eveldo.
4. Hag an trihweh-se a zo kouezet tour Siloë warno hag a zo bet lazetañ,
ha kavoud a ra deoh e oant kablusoh (pe: o doa pehet muioh)
eged an oll dud all a zo o chom e Jeruzalem?
5. Ne oant ket, m'hen lavar deoh; med, ma ne rit ket pinijenn,
c'hwi oll a yelo da goll eveldo.

6. Edo Jezuz o lavared c'hoaz ar barabolenn-mañ:
Eur wezenn 'fñez e-noa eun den e winieg (pe:en e bark).
Dond a ra da glask frouez enni, ha ne gav ket.
7. Hag e lavar da baotr ar winieg:
"Setu tri bloaz 'so ma teuan da glask frouez er wezenn fñez-mañ,
ha na gavan ket.
Trohit anezi eta; d'ober petra e chom da zuna an douar?"
8. Egile a respont: "Mestr, lezit anezi c'hoaz er bloaz-mañ,
amzer din da balad ha da lakad teil en-dro dezi.
Ken buan all e roio frouez hiviziken;
ma ne ra ket, c'hwi a droho anezi."

***** An oll bennadou-lenn, er zulvez-mañ, a heller kemer euz ar bloavez A.
***** Gwelit Kaier n° III, p. 15-21, gand Aviel ar Zamaritanenez.

***** OREZONOU ha PREFAS AN TREDE SUL *****

PEDENN AN DIGOR.-

Aotrou Doue, Tad peb trugarez ha peb madelez,
c'hwi ho peus desket deom kaoud ar pare euz or pehejou
dre ar binijenn, ar bedenn hag an oberou a garantez;
taolât ho sellou warnom pa govesaom ouzoh a galon izel:
neuze, tra ma ra deom or houstians stoui d'an douar gand keuz,
e vezim divehiet ha savet en or zav dre ho trugarez.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo...

WAR AR PROVOU.- Dre ar zakrifis-mañ, Aotrou Doue, plijet gand ho madelez
ma vo ennom gwir volontez da bardoni o mankou d'or breudeur,
pegwir e pedom evid kaoud ar pardon euz or pehejou on-unan.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PREFAS: a/ hini ar Horaiz da zul, cf. Levr-overenn aoter, p.44

pe b/ ar prefes-mañ, a zo ivez evid ar Horaiz da zul:

E gwirionez..... Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
Evid mad ho pugale, da renta dezo glanded ha santelez an ene,
c'hwi ho peus grêt dibaba an amzer-mañ dreist ar re all,
eviddistaga o halon diouz peb c'hoantegez direiz,
ha gouzoud penaoz pledi gand traou tremenuz ar bed-mañ
en eur zelher muioh c'hoaz d'an traou na dremenont ket.
Setu perag...

pe c/ ma 'z eo bet lennet Aviel ar Zamaritanez:

E gwirionez..... dre Jezuz Krist, or Zalver.
Eñ, pa houlenne dour da eva digand ar Zamaritanez,
e-noa dija silet enni donezon ar feiz,
hag a zo plijet gantañ kaoud sehed euz feiz ar vaouez-se
evid enaoui en he halon tan ar garantez divin.
Rag-se e teuom, ni ivez, d'ho trugarekaad,
ha gand an Iliz e kanom hoh oberou kaer, en eur lavared:

GOUDE KOMUNIA.-

Resevet on eus, Aotrou Doue, an arrez
euz madou kuzet ar baradoz,
ha, p'emaom c'hoaz war an douar, eo bet torret deom on naon
gand ar bara euz an neñv;
ho pedi a reom eta, a greiz kalon,
ma teui da wir en or buez kement a zo grêt ennom
dre vertuz an overenn.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PEVARE SUL AR HORAIZ

Bloavez C (21 a viz meurzh 1971)

Lennadenn Ia.- Gouel kenta ar Pask lidet en Douar Santel gand
pobl Israel.

PENNAD EUZ LEVR JOZUE (5/9a, 10-12)

- Goude ma oa bet treuzet ar ster Jordan gand pobl Israel,
9. an Aotrou Doue e-neus lavaret da Jozue: "Hirio am eus lamet diwarnoh
ar vez ho poa da zougen e Bro Ejipt."
10. Bugale Israel, neuze, o deus grêt o hamp e Gilgal
hag o deus lidet gouel ar Pask, d'ar pevarzegved dervez euz ar miz,
d'ar pardaez-noz, er blênenn en-dro da gêr Jeriko.
11. Antronoz ar Pask, o deus debret euz traou ar vro,
bara heb goell ha greun krazet.
12. En deiz-se end-eeun, eo paouezet ar mann da goueza,
pegwir o doa bet euz traou ar vro da zebri.
Diwar neuze, n'eus ket bet mann kén evid bugale Israel,
hag er bloavez-se o deus bet da zebri traou eostet war zouar Kanaan.

SALM 33 / 2-3, 4-5, 6-7 - Diskan: Tañvait ha gwelit
..... Pegen mad eo Doue.

2. Me 'lavarao bennoz da Zoue e peb amzer,
e veuleudi bepred war va muzellou.
3. En Aotrou Doue e lakan va enor (pe: va fouge);
ouz va hlevet, ra vo laouen an dud fidel.

4. Rentit gloar d'an Aotrou Doue ganin; oll a-unan, meulom e ano.
5. Rag, pa zavan va mouez warzu Doue, e vezan selaouet gantañ:
va dizamma 'ra euz peb enkreiz.
6. Pa droer ar zellou warzu ennañ, e vezer er sklerijenn,
heb aon da ruzia gand ar véz.
7. Ha kriet e-neus eur paour a-greiz e drubuill,
Doue a glev hag hen dizamm euz e añken.

Eil Lennadenn. - Pardonet om bet, ar peoh gand Doue on eus
dre Or Zalver.

PENNAD EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (5/17-21)

17. An neb a zo en Aotrou Krist, a zo anezañ eur hrouadur nevez
(pe: a zo unan krouet a-nevez);
an traou a-wechall a zo eet e-biou, setu deut eur bed nevez.
18. Kement-se oll a zeu euz Doue an Tad,
e-neus on lakeet e peoh gantañ dre an Aotrou Krist,
hag e-neus fiziet ennom ar garg da rei e bardon d'an dud.
19. Rag Doue eo a oa en Aotrou Krist o lakaad ar bed e peoh gantañ:
en eur denna (pe: lemel) diwar an dud pouez o fehejou,
pa lak war or muzellou-ni komzou ar pardon.
20. A-berz Or Zalver on eus karg da brezeg,
ha dre or mouez, Doue eo a zeu d'ho kervel.
Hoh aspedi 'reom en ano Or Zalver: grit ho peoh gand Doue.
21. Eñ ha ne ouie ket petra eo pehi, e-neus Doue grêt anezañ pehed
ablamour deom,
evid ma teufem-ni da gaoud santelez Doue drezañ.

SALUD D'AN AVIEL - Diskan: Meuleudi deoh, Aotrou Krist!
..... Furnez peurbaduz an Doue beo!

V. Distrei a rin da gaoud va zad, hag e lavarin dezañ:
Pehet am eus, va zad, eneb an neñv hag eneb deoh.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (15/1-3, 11-32)

1. En amzer-se, ar bublikaned hag ar beherien a veze oll
o klask mond tost da Jezuz evid e zelaou.
2. Ar farizianed hag ar skribed a hrozmole, en eur lavared:
"Hennez a ra digemer vad d'ar beherien hag a zebr ganto."
Jezuz, neuze, a lavar dezo ar barabolenn-mañ:
11. Eun den e-noa daou vab.
12. Ar yaouanka a lavar d'e dad: "Tad, roit din ar pezh a dle dond din
d'am lod." Hag an tad a ro e lod da berh hini.
13. Eun nebeud derveziou goude, dastumet gantañ e oll beadra,
ar mab yaouanka a gerz d'eur vro pell diouz ar gêr,
hag éno e tispign e zanvez o vev en dizurz.
14. Goude m'e-noa foranet kement e-noa, ez eus deut eur gernez vraz er vro,
hag eñ ive a zo kouezet en dienez.
15. Rakket e-neus mond da vevel gand eun aotrou euz ar vro,
hag hemañ e-neus e gaset war ar mêz da ~~vésa~~ (pe: da ziwall) ar moh.
16. C'hoant awalh en deveze da leunia e gov gand ar hlosou a zebre ar moh,
med dén ebéd ne roe dezañ.
17. Neuze e soñj ennañ e-unan: "Nag a vevelien e ti va zad o deus bara
~~d'o gwalh~~ (pe: kement ha ma karont),
ha me amañ o vervel gand an naon!
18. ~~Dao eo din sevel~~ (pe: Sevel a rin) ha mond da gaoud va zad,
hag e lavarin dezañ: "Tad, pehet am-eus eneb an neñv hag eneb deoh.
19. N'on ket din mui da veza anvet ho mab; kemerit ahanon
evel unan euz ho mevelien."

20. Savet eo eta, ha deñt daved e dad.
Pell edo c'hoaz, p'e-neus e dad gwelet anezañ.
Piket e galon gand an druez, an tad a zired
da vriata e vab ha da boka dezañ.
21. Ar mab neuze: "Tad, pehet am-eus eneb an neñv hag eneb deoh,
n'on ket din mui da veza anvet ho mab."
22. Hag an tad a lavar d'e vevelien: "Buan! it da gerhad
kaerra dillad a zo da lakad dezañ, (~~pe: d'e wiska~~)
gand eur walenn war e viz, ha boutou en e dreid.
23. Digasit al leue lard, ha lazit anezañ; debrom ha greom fést a joa.
24. Rag va mab amañ a oa maro, hag a zo deñt beo en-dro;
kollet e oa, ha setu m'eo kavet."
Kregi 'reont eta d'ober fést.
25. Ar mab héna (~~pe: kosa~~), evid-se, a oa er park.
En eur zond d'ar gêr, a-feur (~~pe: dre~~) ma tosta ouz an ti,
e klev trouz soniou ha dañsou.
26. Gervel a ra unan euz ar vevelien, hag e houlenn outañ
petra eo kement-se, (~~pe: petra 'zo~~).
27. "Ho preur, eme ar mevel, a zo erruet hag ho tad e-neus laket laza
al leue lard, o veza m'e-neus e gavet en-dro yah ha dibistig."
28. E kounnar ruz eo eet ar mab héna, ha ne felle ket dezañ mond tre.
Rañket e-neus e dad mond er-mêz, da bourchu warnañ.
29. Med eñ a respont d'e dad: "Setu nousped vloaz emeon en ho servij,
heb dizenti ouzoh morse; ha gwech ebéd n'ho-peus roet din
eur havrig evid ober fést gand va mignoned.
30. Padal, kerkent ha m'eo deñt en-dro ar mab all-se deoh,
debret gantañ ho tanvez gand merhed fall,
ho-peus lazet evitañ al leue lard."
31. An tad a lavar dezañ: "Va mab, te 'zo malhmad ganin, ha kement tra
am-eus a zo dit. [32. Med red e oa ober fést ha beza laouen,
da vreur a oa maro hag a zo deñt beo en-dro,
kollet e oa, ha kavet eo."

***** Evel d'an trede sul, e heller kemer an oll bennadou Skritur Zakr
euz ar bloavez A, pe an Aviel hebken: hini an dén ganet dall,
a gavit er Haier n° III, p.26-29, pe, diverret, p. 30.

***** OREZONOU ha PREFAS AR PEVARE SUL KORAIZ *****

PEDENN AN DIGOR.-

Aotrou Doue, dre ar Zalver, ho Mab, c'hwi 'ra ken kaer tra
ma 'z eo renta d'an dud ar peoh ganeoh-c'hwi;*
grit, ni ho ped, ma poanio pobl ar gristenien,
gand feiz beo ha karantez birvidig,
d'en em brepari evid goueliou Pask, bremañ o tostaad. Dre Or Zalver J.K...

WAR AR PROVOU - A galon laouen, Aotrou Doue, e kinnigom deoh
sakrifis ar zilvidigez peurbaduz, hag ho pedom d'or zikour
d'adori gand feiz ar zakramant
ha da lida ervad an overenn evid silvidigez ar bed. Dre J.K., or Zalver.

PREFAS - Hini ar Horaiz da zul (Levr-overenn aoter p. 44, pe amañ p. 106)
** Ma 'z eo bet lennet Aviel an dén dall, ar prefas-mañ:

E gwirionez..... dre Jezuz Krist, or Zalver.
Eñ e-neus digaset gouenn an dud, o kerzed reuzeudig en deñvalijenn,
da sklerijenn ar feiz, en eur gemer natur mab-dén;
ha pa oant sklavourien d'ar pehed o tond er bed, e-neus grêt anezo
bugale deoh, dre vertuz dour ar vadiziant, mammenn a vuez nevez.
Setu perag emañ ho krouadurien euz an neñv hag euz an douar
o kana eur hantik nevez en eur stoui dirazoh gand doujans;
ha ni ivez, gand an oll élez, a embann ho meuleudi, en eur lavared
da viken:

GOUDE KOMUNIA - Aotrou Doue, c'hwi hag a skuill sklêrded war gement dén a zeu
er bed, plijet ganeoh sklerijenna or halonou gand splannder ho kras,
ma vo bepred or zonzou mad da blijoud deoh, ha gwirion or harantez. Dre...

PEMPVED SUL AR HORAIZ

Bloavez C (28 a viz meurzh 1971)

Lennadenn Ia.- Ar profed a zigas ar bromesa euz eur bed
nevez, eur zilvidigez nevez, kalz gwelloh
eged p'e-noa Doue tennet e bobl euz Bro Ejipt.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (43/16-21)

16. Evelhenn e komz an Aotrou Doue, an hini e-neus bet digoret d'e bobl
eun hent a-dreuz ar Mor Ruz, eur wenojenn e-kreiz an tarzou,
17. e-neus grêt kas d'an emgann kirri ha kezeg,
bagadou ha brezelourien nerzuz,
ha setu emaint astennet, ha ne zavint mui;
da goll int eet, mouget evel eur vechenn houlou.
18. Lavared a ra: "Na jomit ket da zoñjal én amzer a wechall,
n'en em jalit ket gand an traou tremenet.
19. Setu emañ oh ober eur bed nevez,
para 'ra dija, he n'e welit-hu ket?
Ya, digeri a rin eun hent er goueleh (pe: en dezert),
steriou braz en douar skarnilet.
20. Al loened gouez a rento gloar din - bleizi-lern ha struskañvaled -
ablamour ma lakin dour da redeg er goueleh,
steriou braz en douar skarnilet,
evid terri o zehed da dud ar bobl dibabet ganin.
21. Ar bobl-se, diorroet ganin evidon, a gano va meuleudi.

SALM 125 / 1-2b, 2c-3, 4-5, 6

Diskan: Traou kaer 'n eus grêt Doue 'vidom:
..... E barr al levenez emañ.

1. P'e-neus an Aotrou digaset d'ar gêr tud divroet Sion,
e oa evidom evel eun huñvre;
2. C'hoarz laouen ganeom leiz or ginou, ha kan war or muzellou.
- 2c. Neuze e lavare tud ar broiou payan:
"Ken kaer traou e-neus grêt an Aotrou evito!"
3. Ya, ken kaer traou e-noa grêt an Aotrou evidom,
hag edom e barr al levenez.
4. Digasit d'ar gêr, Aotrou, on tud prizoniet,
evel froudou dour en dezert (pe: goueleh).
5. Ar re a hade en eur skuill daelou, a ray an eost en eur gana.
6. Mond ha dond a reent en eur ouela, pa daolent had en douar;
dond a reont en-dro en eur dridal laouen,
pa zougont o drammu-ed a vriadou.

Eil Lennadenn.- Petra eo an dra nemetañ e-neus talvoudegez evid
sant Paõl? Hen lavared a ra er pennad-mañ, skrivet er prizon.
Ali da beb kristen da domma e galon gand ar memez c'hoant
da vond atao war raog, heb selled a-dreñv.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (3/8-14)

8. Va breudeur, e gwirionez, oll draou ar bed-mañ n'int nemed koll evidon,
e kichen ar pezh n'eus netra par dezañ:
an anaoudegez euz ar Zalver Jezuz, va Aotrou.

- Ablamour dezañ am eus grêt ar holl euz oll draou ar bed,
n'int mui evidon nemed teil,
9. evid ober va gounid euz an Aotrou Krist ha beza kavet unanet gantañ,
n'eo ket gand eur zantelez hag a vefe va hini,
deut din diwar heulia Lezenn Voizez,
med gand ar zantelez resevet dre ar feiz er Zalver,
an hini a zeu digand Doue, harpet war ar feiz.
10. Va hoant eo anaoud an Aotrou Krist,
anaoud nerz gallouduz e adsao da veo,
ha kaoud perz en e boaniou, beteg tenna dezañ en e varo,
11. gand an esperans da vond ive beteg an adsao a-douez ar re varo.
12. A dra zur, n'on ket c'hoaz eet da benn,
n'am eus ket tizet ar bazenn uhella,
med derhel a ran da redeg evid e baka,
pegwir on bet, me, paket gand ar Zalver Jezuz.
13. Nann, va breudeur, ne zonz ket din am befe c'hoaz e baket;
med eun dra hebkén a gont: heb en em jala gand ar pez a zo a-dreñv din,
med o skei euz va oll nerz warzu ar pez a zo dirag,
14. e talhan da redeg eeun d'ar pal
warzu ar priz on galvet gand Doue da gaoud er baradoz én Aotrou Krist.

SALUD D'AN AVIEL.- Meuleudi deoh, Aotrou Krist!

Meuleudi deoh, Salver ar bed!

✓ N'eo ket maro ar peher a houlenann, eme an Aotrou,
med e weled o trei kein d'an droug evid beva. -

- Meuleudi deoh...

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (8/1-11)

1. En amzer-se, Jezuz a oa eet da Venez an Olived.
2. Kerkent ha goulou-deiz, ez eo deut en-dro d'an Templ,
hag an dud a zirede oll d'e gaoud.
Jezuz, azezet, a gelenne anezo.
3. Ha setu ar skribed hag ar Farizianed a zigas dirazañ
eur vaouez bet tapet oh ober avoultriaj;
lakaad a reont anezi e kreiz, dirag an oll,
4. hag e lavaront da Jezuz: "Mestr, setu amañ eur vaouez
a zo bet tapet oh ober avoultriaj.
5. El lezenn, Moizez e-neus gourhemennet deom laza a daoliou mein
ar seurd merhed-se. Ha c'hwi, petra 'lavarit?"
6. Evelse e komzent evid e baka, dezo da gaoud tro d'e damall goudeze.
Med Jezuz, daoubleget, a skrive gand e viz war an douar.
O veza ma talhent d'ober goulennou outañ, e sav e gein hag e lavar dezo:
"An hini ahanoh a zo dibeh, dezañ ar henta da daoler mein outi."
8. Hag, eet adarre en e zaoubleg, en em lak da skriva war an douar.
9. Ar re all, goude beza e glevet, en em denn kuit an eil goude egile,
ar re gosa da genta, kén na jom mui nemed Jezuz,
hag ar vaouez en he zav dirazañ.
10. O veza savet e gein, Jezuz a lavar dezi:
"Maouez, e peleh emaint? Den ebed n'e-neus ho kondaonet?"
11. "Den ebed, Aotrou, emezi. — Me kennebeud, eme Jezuz, n'ho kondaonin ket.
Kerzit, ha diwar vremañ na behit mui."

***** An oll bennadou Skritur Zakr a heller kemer euz ar bloavez A :
gwelit Kaier n° IV, p. 4-11. An Aviel a zo hini Lazar savet da veo.

PEDENN AN DIGOR -

Aotrou Doue, grit deom kompren gand pebez karantez evid ar bed
eo eet ho Mab beteg gouzañv ar maro;
ha, dre zikour ho kras, grit deom beva a wir galon
er memez karantez.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo...

WAR AR PROVOU - Selaouit or pedennou, Doue oll-halloudeg,
ha grit d'ho servicherien, sklerijennet ganeoh
war ar feiz kristen,
beza gwalhet o ene dre vertuz ar zakrifis-mañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PREFAS: Hini ar Horaiz da zul (Levr-overenn aoter, p.44, pe amañ, p.106)
- Ma 'z eo bet lennet an Aviel diwarbenn Lazar, ar prefas-mañ:

E gwirionez..... dre Jezuz Krist, or Zalver.
Eñ hag a zo gwir dén, e-neus skuillet daelou war e vignon Lazar,
hag eñ, Doue peurbadel, e-neus grêt dezañ sevel beo euz ar bez;
eñ c'hoaz, leun a druez ouz gouenn an dud,
a zoug ahanom d'eur vuez nevez dre e zakramañchou santel.
Drezañ oh adoret gand an oll êlez, laouen dirazoh da viken,
hag e fell deom unani ganto or moueziou evid ho meuli,
en eur lavared gand kén braz levenez:

GOUDE KOMUNIA - Roit deom ar hras, ni ho ped, Doue oll-halloudeg,
da jom bepréd izili beo d'an Aotrou Krist,
a resevom e Gorv hag e Wad er zakramant.
Drezañ, on Doue beo a oll viskoaz da virviken.- Amen.

GOUEL SANT JOZEF / (19 a viz meurz)

Lennadenn Ia.- Setu amañ unan euz ar promesaou braz diwarbenn ar
Zalver: mab d'ar roue David e vo.

PENNAD EUZ EIL LEVR SAMUEL (7/4-5a, 12-14a, 16)

4. Eun nozvez, e-neus komzet an Aotrou Doue ouz ar profed Natan:
- 5a. "Kê da gomz ouz David, va zervicher, evelhénn:
An dra-mañ a lavar an Aotrou:
12. "Pa vo echu da vuez ha pa vi eet da repos gand da dadou,
e lakin da gemer da blas unan euz da lignez, ganet euz da wad,
hag e roin diazez stard d'e rouantelez.
13. Eñ (eo) an hini a zavo eun ti en enor d'am ano,
ha me a ziazezo stard evid atao e gador-roue.
14. Me 'vo evitañ eun tad, hag eñ evidon eur mab.
Da lignez ha da rouantelez a bado va madelez warno da virviken,
ha da gador-roue (pe: da dron) ne vo diskaret morse."

SALM 88 / 2-3, 4-5, 27 & 29 - Diskan: E lignez a bado da viken. (gw. 37)

pe: Eüruz eo Jozef, euz lignez David, (Ton: Eüruz an hini.-
Mirer dibabet ar Famill zantel.(bis(Heb beza desket, an
dud a ziskan:"Mirer..."

2. Madeleziou an Aotrou Doue a ganin-me da viken;
a rumm da rumm eh embannin pegen feal oh d'ho kër.
3. Hen lavaret am eus: da viken eo diazezet ho madelez,
war an neñvou eo harpet stard ho fealded.

4. Emgleo am eus grêt gand an den dibabet ganin,
touet am eus le da Zavid, va zervicher:
5. "Da viken e virin da lignez heb diskar,
ha da gador-roue a zalhin en e blom a rumm da rumm."

27. Eñ a zavo e vouez davedon: "Va zad oh-c'hwi,
va Doue, ha roh va zilvidigez."
29. Da virviken e virin dezañ va madelez,
ha didorr e chomo va emgleo gantañ.

Eil Lennadenn.- Meuleudi a ro sant Paol da Abraham evid ar
feiz e-neus bet e Doue. Ken braz eo bet feiz sant Jozef,
o kredi dreist da beb douetans e komzou Doue.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM. (4/13, 16-18, 22)

13. Va breudeur, Doue e-noa prometet da Abraham ha d'e lignez
o defe ar bed da herez (pe: heritaj),
n'eo ket, avad, diwar heulia al Lezenn,
med o plijoud da Zoue dre ar feiz.
16. Dre ar feiz eo eta e teuer da gaoud an herez-se,
hag evelse eo diwar eun donezon a vadelez
he deus promesa Doue talvoudegez evid an oll dud euz al lignez-se,
da lavared eo: ouspenn ar re a zo pobl al Lezenn,
kement hini a zo ennañ feiz Abraham. Eñ a zo tad deom oll,
17. hervez ma lavar ar Skritur: "Grêt am eus ahanoud tad eun niver braz
a boblou." On tad eo dirag an Doue e-neus eñ bet feiz ennañ,
a laka buez er re varo hag a ro ar beza d'ar pez n'oa ket anezañ.
18. Harpet war an esperans dreist da beb douetans, e-neus bet feiz,
hag evelse eo deut da veza tad eun niver braz a boblou,

- hervez komzou an Aotrou: "Setu pebez lignez a vo da hini."
22. Hag, evel ma lavar c'hoaz ar Skritur: "Ablamour d'e feiz,
e-neus Doue laket anezañ e stad a justis (pe: e stad a hras).

SALUD D'AN AVIEL.- V/. Evuruz neb a vev en ho ti, Aotrou Doue;
ho meuleudi a ganint da virviken. (Salm 83/1)

*** Evid an Aviel e heller dibab unan euz an daou bennad-mañ:
***

a) PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (1/16, 18-21, 24a)

16. Jakob a zo bet da Jozef, pried Mari,
an hini 'zo bet mamm da Jezuz, anvet Krist (ar Zalver).
18. Ganedigez Jezuz Krist a zo bet erruet evelhénn.
Pa oa Mari, e vamm, dimezet da Jozef, a-barz m'o doa bevet asamblez,
eo bet anavezet e oa dougerez dre vertuz ar Spered Santel.
19. Jozef, he fried, den santel ha mad, pa ne fell ket dezañ he dizenori,
e-neus laket en e benn en em zispartia diouti dre guz.
20. Troet e-neus ar zonzou-se en e spered, pa zeu eun El d'an Aotrou
da bara dirazañ e-kreiz e gousk, o lavared dezañ:
"Jozef, mab da Zavid, arabad deoh kaoud aon o kemer Mari, ho pried,
en ho ti, pegwir ar pez a zo krouet enni a zo eus ar Spered Santel.
21. Genel a raio eur mab, a roiot dezañ an ano a Jezuz,
rag eñ eo a zalvo e bobl euz he fehejou."
24. Pa 'z eo bet dihunet, Jozef e-neus grêt
evel m'e-noa lavaret dezañ El an Aotrou.

b) PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (2/41-51a)

41. Kerent Jezuz a ree beaj Jeruzalem beb bloaz, evid gouel braz ar Pask.
42. P'e-neus bet Jezuz e zaouzeg vloaz, ez int pignet da Jeruzalem
evel ma oant boazet, evid ar gouel.
43. Echu ganto o derveziou, o deus kemeret hent ar gêr,
med ar paotr Jezuz a zo chomet e Jeruzalem,
heb gouzoud d'e dud.
44. Soñjal a ra dezo emañ gand ar re all euz ar gompagnunez,
hag evelse e reont eun derveziad hent;
neuze e klaskont anezañ e-touez o zud kar hag o anaoudegez.
45. Chomet berr d'e gavoud, e teuont war o hiz da Jeruzalem,
da vat ouz e glask.
46. Ha setu goude tri devez e kavont anezañ en Templ,
azezet e-kreiz an doktored, o selaou hag oh ober goulennou.
47. Kement hini e glev a jom souezet gand e skiant hag e respoùchou.
48. Ouz e weled, e dud a zo estlammet, hag e vamm a lavar dezañ:
"Va mab, perag ho peus grêt an dra-ze deom?
Setu edom, ho tad ha me, ankeniet braz ouz ho klask."
49. Eñ a lavar dezo: "Petra ho poa da glask ahanon?
Ha ne ouieh ket e tlean beza e ti va Zad?"
50. E dad hag e vamm o-unan n'int ket evid intent
ar pezh a lavar dezo evelse.
51. Diskenn a ra neuze ganto euz Jeruzalem evid distrei da Nazared,
ha dalhmad e chom sentuz outo.

OREZONOU evid GOUEL SANT JOZEF

PEDENN AN DIGOR.

Doue oll-halloudeg, c'hwi ho peus dibabet sant Jozef
evid beza mirer fidel ho Mab en em hrêt den
p'edo, en e oad tener, o voulha labour silvidigez an dud;
roit bremañ d'hoh Iliz, harpet war e bedennou,
ar hras da genderhel beteg penn gand al labour-se fiziet enni.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh...

WAR AR PROVOU.

Ho pedi a reom, Aotrou Doue:
evel m'e-neus sant Jozef gouestlet oll nerz e galon
da zervij ho Mab karet, ganet euz ar Werhez Vari,
roit deom-ni ivez ar hras da veza glan or halon
evid ho servicha bremañ ouz hoh aoter. Dre J.K. or Zalver.
*** Prefas sant Jozef: Levr-overenn aoter, p. 49.

GOUDE KOMUNIA

Aotrou Doue, d'ho pugale, laouen oh ober gouel sant Jozef,
ho peus roet magadur diwar an aoter-mañ:*
dalhit anezo, ni ho ped, dindan ho kwarez bepred,
ha diwallit n'afe da goll an donezonou ho peus roet dezo.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

GOUEL MARIA VEURZ

Lennadenn Ia..- Dirag ar profed, ar roue Akaz ne 'fell ket dezañ en em drei warzu Doue, ar pezh na vir ket ouz ar profed da zougana (pe: da brometi) sin burzuduz ar Werhez-Mamm.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (7/10-14)

10. Evelhénn e komze an Aotrou Doue ouz Akaz; roue Bro-Juda:
11. "Goulenn digand an Aotrou, da Zoue, eur zin burzuduz, ha pa ve dindan an douar, e bro ar re varo, pe e lein-an-neñv."
12. Akaz a respont: "Ne houlennin netra, ne 'fell ket din amproui an Aotrou."
13. Neuze e lavar Izaias: "Klevit 'ta, bugale David! Ha n'eo ket awalh deoh skuiza an dud, kén na 'fell deoh skuiza va Doue ive?"
14. Ablamour da ze, emañ an Aotrou Doue o vond da rei deoh eur zin: Setu e konsevo ar Werhez, hag e vo mamm d'eur mab, a vo anvet Emmanuel (da lavared eo: Doue ganeom)."

SALM 39 / 7-8a; 8b-9, 10, 11 -

Diskan: Setu me o tond, Aotrou Doue,
..... evid ober ho polontez.

7. Ne blije ket deoh na sakrifis, na provadenn, med va diskouarn ho peus digoret; ne houlennet na sakrifis peurlasket, na sakrifis evid ar pehed.
- 8a. Neuze am eus lavaret: "Setu me o tond."

8b. Skrivet eo el levr diwar va fenn:

9. Ober ho polontez, va Doue, setu va dudi; ho Lezenn 'zo e goueled va halon.
10. Ar helou mad euz ho perz a embannin e bodadeg vraz an dud, ne zalhin ket kloz va muzellou: Aotrou Doue, her gouzoud a rit.
11. Ne zalhin ket ho madelez kuzet em halon, ho fealded hag ho silvidigez a embannin; nann, ne guzan nag ho madelez, nag ho fealded dirag ar vodadeg vraz.

Eil Lennadenn..- Ouz ar Werhez Vari e sellom ar muia en deiz-mañ: ano brezoneg ar gouel hen diskouez. Sonjom koulskoude ez eus kaerroh c'hoaz: p'he deus Mari lavaret "Ya", emañ Mab Doue o tond er bed.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (10/4-10)

4. Va breudeur, n'eo ket gand gwad ejened ha bouhed (evel er zakrifisou koz) e hell beza lamet ar pehejou.
5. Ablamour da ze, ar Zalver a lavar en eur zond er bed: "N'eo ket fellet deoh kaoud na sakrifis na prov, med eur horv ho peus stummet (pe: furmet) din.
6. Ar zakrifisou peurlasket hag ar re evid ar pehed n'int ket bet plijet deoh.
7. Neuze am eus lavaret: Setu me o tond, evel m'eo skrivet diwar va fenn e rolladenn al levr, evid ober, va Doue, ho polontez."

8. Da genta e lavar ar Zalver:

"Sakrifisou ha provou, re beurlosket ha re evid ar pehed,
euz ar seurd a ginniger hervez Lezenn Moizez,
n'eo ket fellet deoh kaoud, ha n'int ket plijet deoh."

9. Goudeze e lavar: "Setu me o tond evid ober ho polontez."

Terri a ra evelse ar stad kenta, evid sevel an eil.

10. Diwar ar volontez-se a Zoue, ez om bet, ni, santelleet
dre ar brovadenn (pe: an ofrans) euz korv Jezuz Krist
grêt gantañ eur wech evid atao.

SALUD D'AN AVIEL.-- V/. Ha Mab Doue 'n em hrêt dén
E-touez an dud e-neus bevet.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (1/26-38)

26. En amzer-se, e oa bet kaset an El Gabriel gand Doue
d'eur gêr a Vro-Halile anvet Nazared,

27. da gaoud eur plah yaouank dimezet d'eun den anvet Jozef,
euz lignez David, hag ano ar plah yaouank a oa Mari.

28. Erruet beteg enni, an êl a lavar:

"Me ho salud, leun a hras, an Aotrou 'zo ganeoh."

29. Hi a zav strafuill enni o kleved seurd komzou, ha sonjal a ra
ganti heh-unan petra 'hell beza ar zalud-se.

30. An êl a lavar dezi: "Na gemerit ket aon, Mari,
rag plijet oh da Zoue.

31. Setu emaoch o vond da gonsevi, hag e viot mamm d'eur mab,
a roiot dezañ an ano a Jezuz.

32. Hennez a vo braz, hag anvet e vo Mab da Vestr an neñvou,
ha dezañ e roio an Aotrou Doue kador-roue (pe: tron) David, e dad;

33. roue e vo war lignez Jakob da viken, heb fin ebed d'e rouantelez."

34. Lavared a ra Mari d'an êl: "Penaoz e hoarvezo kement-se?
Gwerhez on hag e choman."

35. Respont a ra an êl dezi: "Ar Spered Santel a ziskenno warnoh,
ha galloud Mestr an neñvou a holoio ahanoh.

Dre-ze, ar hrouadur a vo santel, ha mab da Zoue e vo anvet.

36. Ha setu Elizabed, a zo kar deoh, he deus konsevet ive, daoust d'he oad,
hag ar hwehved miz eo eviti, goude ma lavarer ne vo morse mamm.

37. Rag Doue n'eus netra dreist e halloud."

38. Mari a lavar neuze: "Setu amañ servicherez an Aotrou:
ra vo grêt din evel m'ho peus lavaret."

***** OREZONOU ha PREFAS GOUEL MARIA VEURZ *****

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, c'hwi 'zo fellet deoh e teufe ho Mab karet

da gemer on natur-den e korv ar Werhez gloriuz Vari;

ho pedi a reom, ni hag a gred eo eñ or Zalver, Doue ha den war eun dro,
roit deom ar hras da denna muioh-mui dezañ en e natur-Doue.

Drezañ, Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo...

WAR AR PROVOU -

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer provadenn hoh Iliz;*

hi hag a oar mad he deus komañset da veza

d'an deiz m'e-neus ho Mab en em hrêt den,

grit dezi, er gouel-mañ, beza laouen o lida e zakrifis santel.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

PREFAS Gouel Maria Veurz

E gwirionez..... dre Jezuz Krist, or Zalver.
Eñ an hini 'oa da veza ganet e-touez an dud evid o zilvidigez,
eñ he deus ar Werhez Vari, dindan skeud ar Spered Santel,
digemeret gand feiz diwar gomzou an El,
ha douget en he hreiz gand karantez.
Evelse e-neus-eñ sevenet (pe: digaset da wir)
ar promesaou grêt da bobl Israel
ha digaset d'an oll boblou, dreist o esperans zoken,
ar pezh edont o hortoz.
Drezañ eo ez oh adoret gand an oll êlez,
laouen dirazoh da viken;
ha ni ivez a 'fell deom unani ganto or moueziou,
or halonou o tridal en eur lavared:

GOUDE KOMUNIA -

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, da startaad en or sperejou ar gwir feiz
a ra deom diskleria eo Mab ar Werhez Vari gwir Doue ha dén; *
dre ar galloud e-neus grêt dezañ sevel a varo da veo
evid or zilvidigez,
grit deom mond d'al levenez peurbaduz.
Drezañ, Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.